

GUERS NEVEZ

Var eun Ton Nevez

Speret-santel me o suppli,
Roet ho crasso ha lumier din,
Ma c'hallin recita eur malheur
A zo c'hoarvezet en quartier Treguer.

Ebars en canton Lezardreo,
Pleumeur-Gautier a ez en dreo,
En devez quentan a viz mai
E safont ho daou euz ar beure.

Evit monet da eun euret da Trédarzec
Da dy eun den Jacques ar Bellec,
Allas ! hag o return a hanne
A zo arriet malheur etreze.

Epad an deiz bars an eured
An diaoul a voa en e speret
O laret dezan laza he bried,
Allas ! a d'ar fin deveus gret.

Pa voaint assembles o leina
Erruet tout ar compagnunez-man,
Un den iaouank zo antreet
Hag hen devoa darempredet

Ho ya bars e yaouankis,
Gant furnez ha peb honnestis
Assa Catherin emezan,
Pa zomp en eur gavet ama.

Ma rafac'h eun dans em requet
Rac pell a zo ini non deus gret,
He fried a voa he hoste-all;
Ho clewet a ra zello fall.

Pa voa ho leinno gante debet,
Ar grasso a zo bet commancet
Pa he finisset ar grasso
Es eo commancet an danso

Donnet a ra an den yaouang-man
Hac he doc en he zorn gantan,
Evit e c'houlén digan e fried
Da ober eun dans en he requet.

Ho ya, danset pezh a gueret
Evidon-me ne zanzin quet
Me a ya brema da gwin ardant
Da eva quen a vesi contant.

Ma fried a ziscoel din erfad
Na neus quet bet désir e daoulagat
Mes pa-seo an danso finisset
E seo returnet da gavet e fried.

Va fried paour, ma hem heret
Dar guer fennos na neffom quet
Rac a loar na vo quet scler,
A pel an hent on deus da ober.

Bed droue a mad gant nep a gomzo
D'ar guer fennos ny a yelo;
Pa voant deus an dol o efa
Feb a vanac'h quen evit partia.

Hag e o tistreit deus he bried,
Dezi neuze en deus lavaret :
Do yec'h et a do crasso mad
Evit da diveza guerennat.

Pa voant arri en bourg Trédarzec
En ty e faëron eo bet antreet
En hano Doue ma faëron, ma loget
Rac ma fried zo guel goleret.

Monet d'ar guer na gredan qet
Gant aoun da veza laset
Et d'ar guer gant o pried
Evid'hon-me n'o login quet,

Ho pried zo eun den dangerus
Ma ho lochen me a ve malevrus,
Quemen tra a meus er bed-man
Ne quet evit resistan outan,

Et eur pennad var an hen bras
E tistrojont en eun hent glas
Bars an hent glas pa zint avancet
Eus e bried e zeo distroet.

Lavar da *in manus* pa gari
E zout er plas lec'h ma varvi.
Ha possible e ve o va Doue
E ve c'hui va fried, em lasfe.

Seiz miz zo omp eureujet
Esom o crigit e eisvet,
Abredic e zeo oas couscoude
Pa hondrouzit cavet ma bue.

En hano Doue n'em lazet quet
Quen a vezo hon buguel badezet
Quen a vezo hon buguel badezet
Neuze me a varvo pa gueret

Rei a ra dezi seiz tol contel
A malevrus an den cruel
Pa ya da rei an eisvet,
E gontel d'an douar zo coueet.

He displantan na elle quet,
Car Jesus na hermette quet
Sevel a ra var e daolin
Da houlen pardon deus o Mest divin.

Ho ma doue, ma fardonet
Ha pardonet ive ma fried
Santez Catherin ma maëronez,
Pedit evit ho filiores.

Ha ma laquet dindan ho protection
Ha goulennet evidon pardon.
Bars eur min bras a zo croguet
Ha var e fen en deus an tollet.

Ha prest e buez zo finisset
Entre dorn an den coleret
Dezi adare en a zo et
He hoste dezi en deus toulllet,
Eur c'hrouader he deus cavet,
Ar malevrus an den possedet
Eur c'hrouader deus ar c'haëran
Ho houlen badisian gantan.

Cri a vije ar galon ma voelje
Bars an hent glas neb a vije
Ho tonet da glevet an innocent
O houlen pleo ha badisian.

Tao ma buguel na teus ezom da voela
Evit ar belder a teus da veva
Da vam a guentan meus lazet
A te vezo an daouvet.

Var an douar en deus-an tollet
Didan e drêit e deus-an friquet
Dezi adare e voa et
Da derri dezi e bisiet.

Hac he diou vron en deus troc'h et
Neuze pa en deus massacret
Gant e mantel deus e coachet
Quazi vel pa vije cousquet

Ha d'ar guer neuze a zo et
Bars er guer pa zeo erruet
E voa tud e di et da gousquet
Goulen digor e neus rousquet.

He vates a zav da guenta
Da diguerri an nor dezan
Quenta mad e deus goulennet
Ma mestres pelec'h e chomet ?

Ho mestres a zo clan neur gavet,
A meus hi paquet da gousquet
Varhoas beure pa vo de
A heet da vili gant hencanne.

Hastit allumi ar golou
Ma vueiljont scler monet d'on gueleou,
Ar goulou pa zeo bet allumet
Ar vatez a zo bet fatiguet,

Ha pe eo bet difatiguet
Digant e mestr e deus bet goulennet
Houi a c'heus eun nevesenti benag
Beuzet e s'eo o tiller gant ar goad,

Ya, nevesenti a meus bet
Car ma fri en deveus goadet
Tapet prompt dime va ac'hoë
Ma mo ma dilled da pemde.

Ma hin da gousquet d'ar c'hignel
A lavaret na vin quet er guer,
Ar plac'h evel ma deus clewet
A ya da sevel an domestiquet.

Ne chomje quet ar c'hrim cuset,
Ma vije an den-ma comeret
Ya, a conduit d'ar prison
Pan devoa sujet a rezon,

Eur vreg deus an amezien
Hac a oa o chom en e hicheu
Er memeus de e voaint eureujet,
Hag o diou a voaint douguereset

An de varle'h deus ar beurre
Hi renque tremen dre ar plas-se
En e c'hichen pa e arriet
Deus e mantel e deus-hi anavezet.

Catherin, emesi, sav alesses,
Te a zo chomet vit an nos aze
Nac entre ma vin en bue
Biquen pred direproch na pe.

He mantel divarni pa deus lemet,
He c'halon a so bet fatiguet,
Ha var dro eun ter heur goude
E finissas ive e bue.,

Var benn eun eis te goude,
Justiç eno em rente,
Ma vije an daou corf paour-man disinteret
Vit goud petra voar ar sujet,

Hervean Nicolas a lavare
Var ar chaffot na pa bigne :
Guerset yaouank tostet aman, me o ped,
Ha c'hui ezac'h demezet,

Ne ne quet defot a zanze
E ra din-me col ma bue,
Me a meus pemb cant scoët leve
A ma fried en devoa outre.

Da noantec vloa meus hi lazet,
Ha me varv var va ugnêvet,
Christien vad me o suppli,
Lavare ivite eun *De profundis*

FIN.

DISPUT ENTRE AN OTROU HAG AR PAYSANT

Voar ton : Ar roue Gralon

AN AOTROU

Pa deus da zadorn en kêr
E clefes caout eur boto lar,
N'em em glever ket er marc'had
Gant an drous deus da voutou koad.

AR PAYSANT

Ne ket goal iac'h us a gredan,
Caout eur boutou lar er gouan,
N'eller quet gante voyagi
En touez ar fank hag ar pri.

AN OTROU

Me voar n'elles quet ho dougen
Evit passeal ar vouillen,
Mes, pa ves prest d'antren en kêr
E clefes chang a voteyer.

AR PAYSANT

Ma tifiskfen va voutou gros
E renkfen ho leser er fos,
N'allan ket em dorn ho derc'hel,
N'ac ho fourra doum em godel.

AN OTROU

O te zo eun den simpl ! perac
Ne glassez ket eun ty bennag,
Evit lezel da houtou koat,
Ken a deufes deus ar marc'had.

AR PAYSANT

Evit eun ignorant m'a z'on
Nouzoc'h ket guelloc'h evidon ;
Peguen zunet e ze hirie
A baysantet a bep coste.

AN OTROU

Caout a rafes evit netra
Eun ti da vont er pad a bla
N'eus fors pe sort hostis er vro
A ve contant d'ar recevo.

AR PAYSANT

Ma ne bean ket va disken
E coustou din diou lipaden,
Penos e c'halfen me eva
Pa meus poan ho caout bara.

AN OTROU

An den ar muis ezomec
A ell c'hoas dispign daou vouennec,
Ha te ne n'out ket er viser
Pe zouguez eun habit merser.

AR PAYSANT

Abalamour d'am guiskamant
N'ellan ket flippa va arc'hant ;
Daou vouennec ar zun, el leal,
A zo he bla ugent real.

(Propriété).

AN OTROU

An avaristed va mignon,
A zo me gred en es kalon,
Eur pez ugent real a bla
Gant an oll a deu hag e ya.

AR PAYSANT

An ini a zo leun e skudel,
Ha na ia sort deus e c'hodel,
A zo brao dean coseal,
Var position ar re all,

AN OTROU

Herves da gomzo e sonj din,
E teus c'hoant da zisputin ouzin :
Ma teus cals a boan en da stad :
Ni renq ive labourat.

AR PAYSANT

Pel goude ma ven var bale,
C'hui ve cousket en ho kuele,
Ha pa vo varnomp ar c'huezen
C'hui ve trankil e pourmen.

AN OTROU

Pep hini e deus e vicher.
Mar e c'heus eul labour pouner,
Me a bromed did n'en de ket,
Ken dies hag ar poan speret.

AR PAYSANT

Pardonnet din, aotrou, bemde,
Me meus an eil hag eguile ;
Poan a meus el labour dija
Ha poan e c'houd penos beva.

AN OTROU

Brao gant da famil a veves
Deus an douar a laboures ;
Dre ma lekes soign a courach,
Ec'h eostes ive davantach.

AR PAYSANT

N'e ket avoac'h din beva,
Red eo da voel mikel bep pla,
Kas eun dornad mad a arc'hant,
D'ar mestr pe na vo ket kontant.

AN OTROU

Pa chomer en eur gommanant
D'eus pini a sav he arc'hant
E just d'ar feurmour zo enni
Pea eur leve divarni.

AR PAYSANT

Ya, ma na vefe ket feurmet
Ken ker evel ma ve guerset :
Bremen zivoas e deus ar c'his
Da feurmi en tu all d'ho fris,

AN OTROU

Ma zeus commananchou er guer
Marc'had mad evit a gaver :
Guelet a meus evit cant scoet
Douar tregont pelevaret.

AR PAYSANT

Me voar zo bet, met n'eus mui
A boe ma man ar mestri
O kreski demp kement ar hec'h
Ma rekomp debi bara sec'h,

AN OTROU

Goud a ran c'heuz bara du :
Mes respont ac'hanon dioustu ;
Ma vefes bevet delicat
Penos e c'halfes labourat.

AR PAYSANT

C'hui sonj d'ec'h ma me bara gueu
Kik rost, guin coz a zaladen,
N'elfent ket labourat ker c'houec,
Na poannia muioc'h calonnec.

AN OTROU

M'an ar cher vad pa d'eun ty,
A zoug an den d'an diegi ;
Hac eur paysan goel dispigner
A zo voued abred d'ar viser.

AR PAYSANT

Ne houlenann quet caout frico,
Evel an dud vras deus ar vro.
Mes beva ordinal en kresq.
Bara mad, kik a souben fresk.

AN OTROU

C'hoant a deus rei da gredi
Ne c'heus easi sorten o ti
Mes da figur din a ziskuel
Ne res ket c'hoareis bemde.

AR PAYSANT

Goude ma meus roet arc'hant
Dam mest ha da gouarnamant,
Ne chom ket ganin peadra
Da gaout ouспен eun tam bara.

AN OTROU

Te a so eur potr fin, a velan,
Tor a meus, tevel a renkan.
Ma keres dont ganin d'am zi
Me ginnik did da dijuni,

AR PAYSANT

N'an, otrou, nan trucarecat,
Me a meus dijuniat mad,
Hac ouспен ze va boutou lous
Er c'hamjou a ra re a drous.

P. DERRIEN.

Lannion, librairie Mlle Duchemin